



# KANTIK

## Introun Varia-Rumengol

1

Lili, arc'hanted ho deliou,  
 Var bord an dour zo er prajou,  
 Doue d'ezoh roas dillad  
 Askuil <sup>er</sup> a meziou pep c'houez vad,

DISKAN

Itroun Varia Rumengol,  
 Guerc'hez galloudus remed holl,  
 Roit deomp hirio, en han Doue,  
 Iec'het ar c'horf ag han ene.

2

O Rumengol, pell amzer-zo  
C'hui eo botred kaera or bro :  
Pep rozen goant, pep lilien,  
A zo disliv en ho kichen.

3

N'eus elestren ebet er prat,  
A daolfe kement a c'houez vad,  
E Leon, Treguer a Kerne,  
Ganeoc'h e klever c'houez an Env.

4

Bleuniou rit c'hoas en ho kosni  
E liorzik goudor Mari,  
Rag hor mam dous adro,  
Pa gar eur vech eo vit ato.

5

Var an Arvor gant Verc'hez,  
Oc'h bet lakeat da Rouanez,  
Rumengol eo he merc'h hena,  
Ganthi eo karet ar mia.

6

Hon tadou koz o ioa kousked  
: tevalijen ar pec'hed :  
aro var roudou pep hini....  
ern heuzus o tigeri....

Var ar mean rus e skuillet goad,  
 Ag er c'hranou, e kreis ar c'hoad,  
 A zidan dervenn Teutates,  
 Tud vige lazet heb truez.

Tec'hit, doueou digalon  
 Setu Guennolet ha Gralon,  
 Tec'hit, tec'hit... var ar mean rus  
 Eo savet chapel Mam Jesus.

E lec'h ar goad, dour a vuez  
 A red en Ilis ar Verc'hez ;  
 He c'haloun eo an eienenn  
 Ne vezo dizec'hed biken.

E Rumengol, ar pelerin,  
 A bedo stard var he zaolin,  
 Awelo a druez he zaelou,  
 Evel digor lez an Envou.

Mar salud teir guech an aoter,  
 En eñ adori hor Zalver,  
 Teir guech a vezo biniguet,  
 Gant tri ferson sakr an Drindet.

Ma ra seiz guech tro~~p~~ ar chapel,  
 Gant ave an eal Gabriel  
 Mari en dioualo bepret  
 Dious Satan ag ar seiz pec'hed.

Ha ma tigemer an hosti,  
 He galon enghan o virvi,  
 Ouz Jesus e chomo stag mad,  
 Etrezoh Pirviken kimiad.

Pelerined, grit evel-se,  
 Kaout a refot grasou Doue  
 Ag e veac'h deut en eur lenva,  
 C'hui ielo kuit en eur gana.

*Ar Mow*

PROPRIÉTÉ LE BRUN.